


11595



CANTIQ

CHRIST BRAS AN ITRON VARIA AR VUR,

BRÊMA EN ILIS SANT VAZE,

E MONTRULEZ.

Var ton Guetz ar Burete.

EUR Vatimant nevez-flam a Rouantelez Franç
A zo bet ét mor bras evit poursui e chang,
Diou Vatimant d'ar zozon o deusi poursuiwet,
Sioas, a dennou canol evit e c'homeret.

Ar Vatimant eus a Franç, o sonjal achapi;
A zo bet en eur gavet e coste Barbari;
Eno e voe goloet eus a dennou canol,
Qen a sonjet voe collet e creis fons ar mor don.

Sete ta ar Vatimant ar vech-màn qemeret,
Hac ebars en abordach cals a dud zo blesset;
Demeus a zozon memes couls hac a gristenien
Gant ar barbaret neuze ne voe espernet den.

E song ar Vatimant Franç o deveus bet cavet

40 4 19 16



Eur Crusufi ar gaera a voa biscons guelet;
Euf Crusufi ar gaera a voe var an douar
Abaone ma, zeo maro Jesus var ar C'halvar.

Pa veljont ar Grusufi a Jesus hor Zalver,
Er commansjont da grial ha da lamet en er.
Setu aman'r fals profet, Doue ar Gristenien;
Goelomp hac en so capabl brema d'en eur difen.

Ar zozon, ar barbaret a ra un drajedi
Gant ar Grusufi Santel er gær a Varbari,
Demeus a dennou canol hac a dennou mousclet
Ar Grusufi adorabl eus murail qær laqêt.

Ne voa payan na tiran na ecouisent o clêvet
Al leou, ar blasfêmou epo o deus losqet.
Bras ê madeles Doue pa ne zint ecragnet
Gant an tan pe ar gurun, pe en douar lonqet.

Guelomp ama, Christenien, pebes punision
O deus bet ar barbaret qercouls hac ar zozon:
An tan demeus an êvou a so bet disqennet
Var magazinou ar poultr, tri mil di zo losqet.

Setu ama eur miracl a gle touch ho calon,
En deveus grêt hor Zalver en presanç ar zozon:
An tan var ar Crusufi ar goad en deus scuillet
Evel ma ras hor Zalver pa voe crusifiet.

Daou Dad Santel Cabucin, a urs Sant Mathurin

In em strincas d'an douar var bennou o daoulin,
 Hac e c'houlenjont ar C'hrist evit dont de breña,
 Hac e lâcajent arc'hant da gontrepoes ounta.

Ar zozon, ar barbaret an eur gavas contant
 O clêvet o devije eur som bras a arc'hant.
 Leqit oc'h aour er valans da gontrepoes anean,
 Hac o pezo ho Toue. It pa g'cret gantan.

Clêvit amân' tud devot, tud pinvidic pe baour;
 Laqêt voe ar Grusufi da boeza gant an aour:
 Pem p cant liour a oa ennân p'oa laqet er valans;
 Pem loujs aour e save, ha c'hoas o devoa lans.

Omân so eur Grusufi a so miraculus,
 Hac a so ar guir bortret eus hor Zalver Jesus,
 Pa voa ganemp er bed-ma leun demeus a vue:
 Meulet ra vezo Jesus en douar hac en êu,

Antreet eo ar Vatimant e Rouanteles Franç,
 Er gêr eus a Voutroulez gant peb seurt assuranc;
 Ar c'hleier a Vontroules o unân a zonne,
 An oll a voa estonet o velet gemense.

Ar Grusufi adorabl, renter e Montroulez,
 Garg'et ebars en eur c'har evit mont var a mes,
 Eis aneval voa ontan vit e gas da Blourin;
 Eqichen Ilis ar Vur e chomas a la fin.

Ebars en gêr Montroulez, en ti Guerc'hes ar Vur,

Voa guechal ar Grusufi visitet gat tud fur ;
 Eno ezeo bet chomet nombr bras a vlaveziou ,
 Hac epad an amzer-ze' rê cals a viraclou.

Aboe ma zê distrujet an ilis dévot se ,
 Ema'r Grucifi gaer-ma en ilis Sant Vaze ;
 Itron Varia ar Vur a so ive enni ;
 Rac se ta, oll Vretonet, demp ep fot d'o fedi.

Habitantet Breis-izel, deut oll da Zant Vaze ,
 Deut da offr o pedennou da Rouanez an ên ;
 Ma no c'heus affliction, deut a greis o calon
 Da visita'r plaç santel gat guir devosion.

Cals a so a Christenien pere ne sonjont get
 Eve necesser ar groas evit bea salvet ;
 Birviquen den ne antre en Barados Doue ,
 Ma na zougont get ar groas etro pad o bue.

An oll Sent ha Senteset d' deveus bet doug'et
 Ar groas demeus a Jesus so bet crusufiet ;
 Oll ebestel hor Zalver so bet merzeriet ,
 Hac ar profet Isai a so bet esqennet.

Hor Mam Santel an Ilis a deu d'on exorti
 Da gavet recours d'ar groas etro pad hor bue ;
 En heur hor maro memes en hor Sacramanchou ,
 Dre ar groas e comancer an oll foncsionnou.

Croas an honor a Jesus a so get puissant

Mar ra d'an oll diaoulou tec'hel en un istant
 Deus ar bec'herien memes; mar goulehont pardon,
 Digant Jesus hor Salver deus a greis o c'halon.

Pa deui Satan d'o tenti, resistit gat courach,
 Roit ho calon da Jesus hac e trec'het al las,
 Grit sin ar groas var ho tal ha var' boul ho calon;
 Galvit Jesus d'o sicour, sonjit er Bassion.

Setu aze, Cristenien, histor ar Crusufi,
 Deomp oll d'e adori hac ar Verches Vari;
 Induljançou cals memes a so bet acordet
 Da neb zougo anezè gant devosion barfet.



G U E R Z

VAR BASSION JESUS-CHRIST.

Var an ton ancien.

ALES an ên, deut d'an douar,
 Disqennit var menes Calvar,
 Da ober canvou d'hor Zalver,
 Pa ne gar ar bed o ober.

Me o ped, Sant Mikæl eurus,
 Ha dreist an oll, c'houi, Mam Jesus,
 Obtenit deomp ur c'heus santel,
 Da ouela e varo cruel.

Hor c'halen a dleffe ranna
 Gant ur glac'har an estrancha,
 O consideri e boanniou,
 Hac o velet e c'houliou.

Pa gonsideran e boaniou,
 Pa zonzàn en e dourmanchou,
 Pa ya va speret er C'halvar,
 E rann va c'halon gant glac'har.

Sellit, pec'herien, ouz ho Tad,
 Sellit maro e zaoulagad,
 Ha gant ar spern treuzet e ben,
 Antreet ebarz e empen.

Sellit e faç qer leun a voad
 Sellit e zaou zorn, e zaou droad,
 A so staget gant an tachou
 En deus forjet hor pec'hejou.

Sellit e gostez gouliet,
 Sellit e gorf crucifiet;
 Mar o sell ho calon hep qeus,
 Ezeo grêt 'a zir ma na deus.

An douar a deu da grena,
 Ar vein a deu d'en em frailla,
 An eol, al loar hac ar stered
 A gus o faç gant ar regret.

Ha c'houi, pec'herien obstinet,
 Ne rit seblant na cas ebet
 Evit guelet maro ho Roue,
 Ho Tad, ho Salver, ho Toue.

Goas oc'h eg'et e vourevien,
 Goas oc'h eg'et ar yudevien,
 Rac darn anezo, pa varvas,
 A oue touchet gant ur c'heus bras.

Arreze n'en anayen get,
 O sonjal voa ur fals Profet;
 Mes c'houi, pec'her, a oar piou e,
 C'houi oar ez eo guit Vab Doue.

Bep pec'het marvel oc'h eus gret,
 Ouc'h ar groas oc'h eus er stag'et,
 Ha digoret a nevez-flam
 E c'houlou, pebes estlam !

Mar oc'h eus ounta nep truez,
 Chenchit brema ho coel vuez,
 Chenchit-eta, chenchit affo,
 Hac e dourmanchou a cesso.

Grit oc'h examen dilijant,
Goulennit pardon fervamant,
Grit prest ur guir govession,
Gant glac'har ha gontrision.

It d'en em reconsilia,
Hep differi, gant ho nessa;
Grit d'an oll satisfacson,
O pardoni a vir galon.

O pedi, o rei aluzen,
O yun, o c'hober pinijen,
E consolot ho Tad Jesus
En e Bassion truezus.

Ha c'houi, va Zalver, va Doue,
Pa guitai va c'horf va ene,
Recevit-y, me o suppli,
E mesq an Aetes d'o meuli.



E MONTROULEZ, cus a Imprimeri LEDAN.